

Sant Loeiz (Trevrin) / Saint Louis (Treffrin)



Diskan :

**O Sant Loeiz, c'hwi 'zo bet dalc'hmat
Evit an holl dud ur skouer vat.
Troit kalon ho Travriniz
Gant Doue ha gant an Iliz.**

Refrain :

***O saint Louis, vous avez toujours été
Pour tous les gens un bon exemple.
Tournez le cœur de vos Treffrinois
Vers Dieu et vers l'Église.***

1 – Aotrou Sant Loeiz, hon Sant Patron,
Kreskit hon feiz, hon nerzh-kalon,
'Vit ma vimp holl gwir vugale
Da Rouantelezh an Aotrou Doue.

*Monsieur Saint Louis, notre Saint Patron,
Faites grandir notre foi, notre force d'âme,
Pour que nous soyons tous les vrais enfants
Du Royaume de Dieu.*

2 – Savomp hon mouezhioù da veuliñ
Hon fatron mat ha d'e bediñ
Evel gwechall hon zadoù kozh,
Ma skuilho warnomp e vennozh.

*Élevons nos voix pour louer
Notre bon patron et le prier
Comme autrefois nos ancêtres,
Qu'il répande sur nous sa bénédiction.*

3 - E-pad am amzer 'oa bugel,
'oa fur ha dous evel un ael.
Eus e vamm Gwenn e oa sentus,
'velti da bediñ aketus.

*Durant le temps où il était enfant,
Il était sage et doux comme un ange.
Il était obéissant à sa mère Blanche,
Et comme elle assidu à la prière.*

4 - Ho karout, a lare e vamm,
Kement ha ma c'hellan a ran,
Met gwelloc'h 'vefe 'r maro-terrubl
'Get ober ur pec'hed marvel.

*Vous aimer, disait sa mère,
Autant que je peux je le fais,
Mais une mort horrible serait préférable
À un péché mortel.*

5 - Deskit dimp 'ta, o sant bras,
N'hon eus nemet daou hent da choaz :
An hent start a gas d'an Neñvoù,
'N hini ledan d'an ifernioù.

*Apprenez-nous donc, ô grand saint,
Que nous n'avons le choix qu'entre deux routes :
La route difficile qui mène au Ciel,
La route large qui mène à l'enfer.*